



MARVAILLOU AR VOTEZ-TAN

PENNADOU GAND PER-JAKEZ HELIAS
SKEUDENNOU BREIZ GAND JOZ AN DOARE



PER-JAKEZ HELIAS

OBEROU E BREZONEG

EMBANNET BETEG 1961 :

- 1947 — Biskoaz Kemend-all!...
(Pemp c'hoarzigell, embannet evid strolladou-
c'hoarierien gand **Ar Falz**, diviet.)
- 1947-1953 — Peziou-c'hoari berr, Kontadennou, Barzonegou
(meur a hini lakeet dezo eur zonerez gand Jef
AR PENVEN), embannet er helaouennoù (**Ar Falz**,
Ar Soner, **L'Action Laïque**, hag all...)
- 1953 — Eun Ano braz,
darvoud e daou arvest, embannet gand **Ar Falz**
ha Kuzul Gouelioù Kerne.
- 1954-1956 — Barzonegou,
embannet e **Ar Falz**, **Breiz**, *h.a.*, en dastumadenn
Kanomp Laouen (gand Sonerez Jef ar Penven),
war gartennou-post **B.A.S.** (gand sonerez P. Mon-
jarrel).
- 1957 — Tan ha Ludu,
pevar arvest, embannet e niverenn genta **Brud**.
- 1957 — Mojennoù Breiz ar Mor,
d'o heul skeudennou Breiz gand Joz an Doare,
embannet gand **Emgleo Breiz** (peuzdiviet).
- 1957-1958 — Barzonegou distag,
embannet e **Brud** 2 ha 3. •
- 1958 — Bed, barzonegou,
e **Brud**, niv. 5.
- 1959 — Kanadenn Penn-ar-Bed, barzonegou,
bet savet evito eur zonerez evid laz-seni gand
Jef **AR PENVEN**, embannet e **Brud**, niv. 7.
- 1959 — Mojennoù Breiz : 2. — War drôz ha war veg,
skeudennou Joz an Doare (**Emgleo Breiz**).
- 1959 — Wevel ar Gosker,
darvoud, embannet e niverenn 8 **Brud**, hag, e
1960, gand **Ar Falz**, dindan stumm eul leor,
ennañ ive roll oberou ar skrivagner e brezoneg
hag e galleg.
- 1960 — Daouwenegad furnez, *enn* 40 pennad bennag
embannet war **La Bretagne à Paris**.
- 1961 — Liziri a Vreiz, eun 40 pennad bennag embannet
war an heveleb kelaouenn.
- 1961 — Kantigelloù ar glahar,
kanaouennoù, toniou lakeet dezo gand Mikael
Magne, embannet gand **Mouez Breiz** (pladenn
4592).
- 1962 — Marvailloù ar Votéz-Tan,
deg marvail, skeudennou Joz an Doare d'o heul,
embannet gand **Emgleo Breiz**.

Da veza embannet :
Ar Rous Kado, Katrina, an Den a-bell, Trolou Jakez (c'hoariva). — O hortoz antronoz, Maner kuz (barzonegou). — Kontadennou ar Ganevedenn, Yannigou, Pôired ar Hornog Ruz, hag all..

PER-JAKEZ HELIAS

MARVAILLOU

AR

VOTÉZ-TAN

LUHSKEUDENNOU

GAND

JOZ AN DOARE

EMGLEO BREIZ

B. P. 17, - Brest

1962

EUN DIBAB LEORIOU

a heller goulenn digand "EMGLEO BREIZ"

I. LEORIOU-STUDI :

| | Priziou dre bost : |
|--|-----------------------|
| ● Geriadurig brezoneg-galleg ha galleg-brezoneg, gand V. Seite ha L. Stephan (trede moulladur, 10 ved mil) | 4,50 |
| ● Deskom Brezoneg, leor-dorn evid ar skoliou, gand V. Seite ha L. Stephan (eil moulladur war ar stern) | 8,40 |
| ● Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg (evid ar re a grog da zeski), gand an Dr. Tricoire | 3,70 |
| ● Cent Textes français à traduire en breton, gand P. Trepos | 2,50 |
| ● Le Pluriel breton, gand P. Trepos | 16,40 |
| ● Pennadou-Lenn dibabet evid Skoliou Breiz (2 leor), embannet gand Ar Falz | |
| ● Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg (Eil lodenn), dindan ar wask (wardro 200 pajenn) | |
| ● Ar Brezoneg dre ar skeudennou (Le Breton par l'Image), eil voulladenn, nevezet, war ar stern .. | |
| ● Breiz or Bro, leorig-dorn (Istor, Douaroniez, Yez ha Lennegez), embannet gand Kendalc'h | 2,30 |
| ● Grammaire bretonne (mémento) gand A. Ar Merser | 3,50 |
| ● Skol ar Brezoneg, dastumadenn pennadou-studi evid ar Skoliou | 5,50 |
| ● Diou gontadennig (evid ar Skoliou) | 1,60 |
| ● Ar Honiklig Boudedeo (evid ar vugale) | 2,80 |
| ● An Azennig Bihan (evid ar vugale) | 2,80 |
| ● Bilzig, Pennadou-lenn evid ar skoliou | 2,60 |

PLADENNOU EVID DESKI AR BREZONEG :

| | |
|---|----|
| ● Komzom, lennom ha skrivom Brezoneg : kenta pladenn (kentelio displeget gand kelennerien ha yaouankizou lise Kemper); da veza goulennet digand « Coopérative Breiz », B.P. 78, La Baule .. | 17 |
| ● Eil bladenn, embannet gand Kevrenn ar Yez Kendalc'h, da veza goulennet digand « Breiz » ivez .. | 22 |
| ● Fest-Noz e Groñvel, pladenn embannet gand « Mouez Breiz », Kemper (ar hanaouennou a heller kavoud e niverenn 5 « Brud » : 3 LN) | 22 |
| ● Kan ha Diskan, Kanaouennou-pobl dastumet e bro-Boullaouen (komzou ar hanaouennou war eul leor da heul ar bladenn), da houlenñ ouz « Coopérative Breiz » | |

2. DANEVELLOU :

| | | |
|---|------|----|
| ● Geotenn ar Werhez, gand Jakez Riou | 4 | LN |
| ● Ar Roh Toull, gand Jakez Kerrien | 4 | |
| ● Mojennou Breiz : I. Ar Mor, gand Per Helias | 4 | |
| ● Mojennou Breiz : II. War Drêz ha war Veg, gand Per Helias | 4 | |
| ● Kizier-Nez Sant-Pabu, gand Mab an Dig | 2,50 | |
| ● Bilzig, gand Fañch Al Lay | 7,50 | |

3. C'HOARIVA :

| | |
|---|------|
| ● Gurvan ar Marheg Estrañjour, gand Tanguy Malemanche | 6,50 |
| ● Mevel ar Gosker, gand Per Helias | 5,50 |
| ● Tan ha Ludu, pevar arvest, gand Per Helias | 3,50 |
| ● Eun den maro ha ne goll ket e benn; Piou e-neus lazet an hini koz, daou bezig-c'hoari gand Per Helias | 2,50 |

4. BARZONEGOU :

| | |
|---|------|
| ● Barzonegou, gand Reunan Ar Moug | 2 |
| ● Gand red an Dour, gand Roparz Broudig | 2 |
| ● Bleuniou Arvor, gand Mab an Dig | 2,80 |
| ● Dason ur galon, gand Loeiz Herrieu | 7,90 |

5. KANAOUENNOU :

| | |
|---|------|
| ● Kanom Uhel, embannet gand Kendalc'h | 2,30 |
| ● Yaouankiz a gan, embannet gand B.A.S. | 1,80 |
| ● C'houez er Beuz, dastumet gand P. Monjarret, embannet gand B.A.S. | |
| ● Kan ha Diskan, kanaouennou dastumet gand Kelh Poullaouen (eil voulladenn) | 3,50 |
| ● Kan ha Koroll, leorig evid ar helhiou | 1,10 |

*Leoriou da veza goulennet e ti al Leorierien,
pe digand Embannadurioù Emgleo Breiz :*

« Editions F.C.B. », B. P. 17, Brest — C.C.P. 380-96, Roazon.



AR VOTEZ-TAN

ECHU e oa, e Breiz, mare ar goulou-rousin, hag e veze gwelet hoaz koulskoude gwrahed o tremen en henchou war ar miz hag e ruioz or bourhadennou, o tougen gand evez braz, e pleg o ilin, eur votez koz, kuchennou moged a tifuka diouti.

Pearvuia o-deveze labourer e-doug an deiz e parkeier an dud all ha digas a reent ganto d'ar gêr glaou-tan da domma o zier goulo. glaou-beo kemeret diwar eun oaled pinvidig, flamm warnañ dre greiz an deiz. Re ger e oa evito an alumetez, red ma oa dezo konta gwenneg dre wenneg. Ha dreistoll, prestat e veze an tan an eil d'egile, evel eun testeni a emgleo hag a gompagnunez vad, dres evel ma veze prestat goell da lakaad toaz da zvel.

Dastumet e oa bet pikou-pin er hoajou gand ar gwrahed. Pourvezioù brao anezo a zalhent etre ar bank ha korn ar ziminal. Eur wech digaset ganto ar glaou-beo er votez-tan, trawalh e oa eun dornad deliou evid lakaad an traou da zraskal hag eur geueudenn bennag evid tomma ha sklerijenni war eun dro. Eur gwir vennoz vad e oa an tan drezañ e-unan.

Bet on-me a-wechou o kerhad etivi evid Majjan Bourdon goz. Herzel a ree zhanon war an hent, pa vezen bet o kas ma buoh d'ar park : « Savit war dreuzou ma dor, biannig, a lavare-hi din, ha sellit mad ouz ar ziminaliou. Ma welit unan o tivogedi, kerzit war-eeun etrezeg emni ha diskouezet ar votez. » Morse n'eo bet nahet ouzin rei tan evid Majjan. Ha digouezet eo bet din, eun dro, digas dezi eur meutad butun evid he horn. Enaouet an tan ganti, tomma ree he daouarn koz ha ne vanke ket da huanadi : « Dao e vije bremañ kaoud unan bennag da gonta ar marvailloù. » Nemed maro e oa kement marvailher brudet a deue e ano ganti.

Da vare he yaouankiz dezi e veze beilladeg-goañv er penkêriou, e ti pe di, pep hini d'e dro. Ne veze dispign ebet, evid an ostizien, nemed an tan. Ar vestrez a deue eun tammig abretoh deuz ar park. Mond a ree da gerhad glaou-beo e ti baraer ar hrozhent. Tan a c'hwete, boued a roe dezañ, da gaoud eur gwelead etivi, peadra da danflamma eur pilgoz dero lakeet da zehi pell a oa gand an ozah e korn an oaled. Devi a ree ar pilgoz gand flammou berr beteg diwezad en noz. Trodro dezañ an dud en em starde evid selaou ar marvailloù. Echu ar marvailloù, ne jome nemed eun dolzenn o ruzella, paket en eur bluskenn ludu frellet. Mestr an ti a dorre ar bluskenn gand eur varr goz hag a ranne ar glaou-beo etre an dud. Darn o-doa digaset ganto ar votez-tan evid dastum o lodenn etivi. Darn all, pa veze seh an amzer ha sklêr al loar, a gawe muih a blijadur o tenna eur votez deuz o zroad da zigemer ar glaou. War jilgamig e tistroent d'ar gêr hag e vezent klevet o c'hoarzin en noz. Bez e rankent kas ha digas an tan etre beg ha seul, e doare eur *hirie eleison*, gand aon da zevi ar votez paour. N'eo ket heb poan e teuent a-benn euz o zaol, hag antronoz e tiskouezent ar votez, duet an diabarz outi, hag e touent n'o-devefe yen d'o zreid birviken mui.

Hirio an deiz, ar boteler-tan zo deut ken rouez hag ar peziou sour, ha n'eus den ebet ken evid dibuna ar marvailloù evel ma tleer ober. Selaouit ar re ziwete em-eeus-me klevet e Breiz-Izel, dindan an dumenn. Lod anezo a zo koz-douar, ar re all n'eo ket eet hoaz ar marbleo diwarno. Diwanet eo ar re nevesa en amzer ma veze greet du-mañ kirri-nij euz an « avioned » ha kirri-tan euz an « otoiou ».

Digas a reent ganto d'ar gêr glaou-tan da domma o zier goulo.



MARVAILLOU AR VOTEZ-TAN

YANN SKANV-E-DAMM

YANN a oa baleer-bro. N'eo ket honnez eur vicher da zastum madou. E dad, araozañ, e-noa diazezet ar stal-genwerz evitañ, eur stal ha ne oa enni marhadourez all ebed da werza nemed trouz an teod distagellet, ijinou-laosk hag a-wechou troicou-kamm da honid eun nozvez pe eun eiztevez e Ostaleri an Toull-Bab. Hogen, gand eun drederenn deuz an danvez-spered a zispigne Yann da drufa e vara pemdezieg, e vije deut pinvidig-mor o chom azezet a-dreñv eun daol-gont en eur vourhadenn.

Med ar paour kêz diaoul ne oa ket evid padoud heb mond pelloh. Atao e oa gantañ eun troad savet hag eur fronell o c'hwesa dirazañ. Moarvad eun avel-dro gantrer e-noa kavet an tu d'en em zila en e benn dre eun toull digor bennag hag abaoe e tispae dindan e glopenn ken stard hag eur pesk er gidell, heb gouzoud an nor da dehoud kuit. Avel e benn a riñse Yann a-dreuz Breiz-Izel, deuz Kornog da Reter ha deuz Kreisteiz da Hanternoz, o trei-distrei heb lavared perag. N'eus netra sotoh eged eun avel-dro a ra tro endro d'e vro nemed eur haz o redeg warlerh e lost. E berr gomzou, o veva diwar-nij, Yann ne oa ket nehet gand pouez e yalh. Setu perag e oa bet anvet Yann Skañv-e-Damm.

Ar gwasa planedenn, avad, a oa hini e wreg. Ar baleer-bro, hag a gase re vuan evid dastum skoejou war an hent braz, e-noa kutuillet dre zievezter eun tamm plah kejet gantañ en eur hroaz-hent bennag, eun annoar pennfollet ha torret ganti he nask. Abaoe bloaveziou e valec-hi e skeud he gwaz, treud ha truilenneg, diliard ha diwalenn, nemed he-doa miret groñs, en eur zah lien, he dillad-eured ha mantell-gañv he mamm.

Eun abardaev, an daou bried a ruze o zreid war eun hent, divalo awalh ar stad outo. Yann Skañv-e-Damm a oa deut ken skañv hag e ano, m'hel lavar deoh,

Warhoaz e tlean beza war vourz ma lestr,
da houlo-deiz.



hag ar wreg e oa debret he dremm gand he daoulagad ken du hag an naon gouez a veve enni. Abaoe tri devez, n'o-doa digoret o genou nemed da eva dour-red ha da chaokad frouezennoù glaz. Gwenneq ebed, an doriou serret dirazo, ar chas o harzal war o zruillou, ar reuzeudigez penn-da-benn. Yann a jomas da ziskuiza war eur mên-bonn, e vaouez harpet ouz e gein, hag aze e kavas an den e sklerijenn. Homañ ne zeuas ket deuz ar mên. Deuz ar zah lien ne lavaran ket.

Div eur goude, dor Ostaleri ar Piler Ruz, e Brest, a zigoras dirag daou zen yaouank. Eur plah mistr he daoulagad braz ha du, gwisket en he dillad-eured giz bigoudenn, hag eur pôtr digabell kaer, goloet gand eur vantell zu he stagellou arhant, warnañ tres eur bourhiz pe gentoh eun ofiser. O boteier ne oant nemed eur boutrenn. « Arsa, ostiz, eme an aotrou, tagnous an tamm outañ, na pegen fall-ki eo an henchoù ganeoh dre amañ! Torret am-eus rod ma harr en toullou ha karrer ebed n'am-eus kavet abaoe. Setu am-eus ranket bale tost teir leo gand ma gwreg nevez-dimezet evid dond beteg ho ti. Rag warhoaz e tlean beza war vourz ma lestr, da houlou-deiz. Buan! Digasit war an daol ho kwella meuziou ha kempennit deom ho kaerra kambr! »

An ostiz a vlejao d'ar mitizien, a redas d'ar gegin, a zizahas d'ar hao. Ha setu al liñsel war an daol, ar hig rostet o tivogedi, gwin koz Bourdel o hourgoullad er gwerennou. An daou zen yaouank a ziskennas boued enno ken fonnuz m'ho-pije kredet e oant goullou beteg ar zeulioù, a rastellas ar bara diwar an daol dre ma tigoueze, ken ne bade ket eur vruzennenn war o lerb, a skarzas o gwier ken aliez ha ma vijent bet beskennou lutin. Pa ne jomas ken nemed an doubier dindan o daouarn, int a laoskas eun huanadenn hag a bignas d'o hambr. An itron yaouank a vouskane eur zonenn a garantez, an aotrou a ziskane gand ar bregas hag an hik.

Med antronoz, da houlou-deiz, setu eun trouz all. Klevet e oe an aotrou oh ober eun dispah spontuz gand an arreboueri hag o hopal d'an ostiz. Hemañ a bignas d'an daoulamm hag a gavas eun den fuloret-ruz ha noaz-ran : « Ostiz brein! Kouezet on amañ en eun toull laeron. Sellit 'ta! Epad ma oan kousket, ez eo bet skrapet diwarnon ma roched, ma forpant, ma bragez, ma botou ha, gwasoh hoaz, ma boujedenn gand deg skoed aour. Tra gaer m'eo chomet ma mantell war o lerb. Awallh din evid mond beteg ti ma eontr an amiral ha sevel klemm. Kement-mañ a gousto ker deoh, mab ar groug! » Nehet-maroc, an ostiz paour hag e oll dud a furchas an ti kreh-ha-traoñ. Ne oe kavet netra. Ha netra d'ober nemed digas dillad nevez d'an aotrou yaouank ha resteurel dezañ e zeg skoed aour. Yann Skañv-e-Damm a reas peoh dre vadelez hag a dreuzas an nor, e benn uhel, e wreg en e skeud.

Eun nebeud amzer goude, an ostiz a yeas da derri eun tamm douar e penn-traoñ e lioz da hada karotez ruz. Hag ar varr a ziglozas eur pakad truilhou, eur roched didoullet, eur porpant pillaoeg, eur bragez teuhet beteg an neudenn. An amiral n'e-noa niz ebed.

An doriou serret dirazo, ar chas o harzal war
o zeulioù...

DIGOLL GWIDOU

Aotrou maner Leznarvor, e parrez Pouldruzig, a oa skragnoh eged eur hi gand e askorn mel. Mond a ree al'esa posubl da glask e verenn ouz taol eur merour dezañ, an den Gwidou. Hemañ a laboure douarou Penkleuziou, a-dreñv ar maner, hag e-noa eur wreg dornet mad da aoza krampouez ed-du gand amann druz d'o zikour da ziskenn. Bewech, an aotrou a lonke teir zousenn krampouez, a skarze peder skudellad léz-mesk, a gane seiz meuleudi d'ar vestrez hag a denne e dreid d'ar gêr, leuniet gantañ e zah evid netra. Pa ree Gwidou da houzoud dezañ e-nije karot mond eur wech d'ar maner da zebri e verenn ivez, egile a jome bouzar e-giz eur votez. War an diwez, koulskoude, e pedas ar merour da zond d'ober fest er maner « eun devez bennag ». Hogen, beb tro m'en em ziskouezas Gwidou war dreuzou an ti braz, ar paour kéz denig a gollas e amzer : ar mestr a ranke mond dioustu da Gemper evid e aferiou, ar mestr e-noa kemeret louzou evid an droug-kov, ar mestr a oa dres o sterna e varh evid mond da jaseal war zouar Kerviel gand beskont Kremeneg. Gwidou a zigase d'ar gêr bouzellou goullo, fri hir, klipenn ruziet gand ar vez hag ar gounnar.

Eur zulvez vintin, an den a wiskas e jupenn hag a lavaras d'e wreg, krak-haberr : « Ma-Loelza, mond a ran da glask merenn da vaner Leznarvor hag, ar wech-mañ, ne vin ket trehet gand an aotrou skragneg-se, kousto pe gousto! » Ha Gwidou kuit, prenet e zent hag eur hovad droug ennañ da hortoz ar hovad boued.

Erruet e porz ar maner, eñ en em zilas, heb trouz ebed, beteg prenestr ar gegin, a oa hanter-zigoret. Damguzet e deliou eun lliavenn, ar pôtr a hellas teuler eur zell e-barz ar zal vraz. Ha Petra welas? An aotrou, azezet ouz taol, a oa da vad o vuzulia eur bern silzig. An itron, en e gichen, a zispae toaz da boaza ar houign-amann. Ar geginerez, war an oaled, a oa dres echu ganti displuñva eur yar-lard. Gwelloh hoaz, eur penn-hoh, kempennet brao war eun tamm lien-tiegez, a hortoze an tan da domma evid mond er pod-houarn. O weled kement-se, ar paour kéz Gwidou a ginnigas lonka e deod.

Aotrou Leznarvor a lavare d'e wreg : « Godig, aon braz am-eus e tigouezfe Gwidou beg-braz warnom. Ma welle hennez kement a draou da lipad, e kredfe eo deut ar mare mad evitañ d'en em zigoll deuz ar hrampouez divalo ha deuz al léz trenket am-eus diskennet a-wechou en e di gand mil boan evid ober plijadur d'e

Erruet e porz ar maner, eñ en em zilas,
heb trouz ebed, beteg prenestr ar gegin,
a oa hanter-zigoret.



vaouez paour. Penaoz ober ma teufe an diod-se war an taol?» Hag ar wreg a respontas : « Arabad deoh kaoud aon. Ne vim ket paket berr gand ar paitog-se. Klevet e vo o treuzi ar porz gand e votou teleg. C'hwï a daolo prim ar zilzig e tiretenn an daol. Me a azezo war vodez an toaz. Ar vatez a guzo ar yar displufivet er bank hag ar penn-hoh dindan ar baill-kouez. Ne vo penn-hoh ebed da weled nemed hini Gwidou Penkleuziou.» Ha da ziroll da c'hoarzin o-daou, hag ar vatez kemend-all, ken e krene ar penn-hoh war al lien.


Awalh e-noa selaouet Gwidou. Eur vunutenn goude, tud ar maner a glevas trouz e votou-sul war ar porz, eun trouz spontuz evid ober da houzaud e oa an den o tigouezoud e kêr. Ha pasadeg da heul, keit ha ma oa ganti. Raktal, ar boued a oe kuzet. Ne jomas ket eur bilpouzenn war al leur.

« Sellit 'ta! eme an aotrou. Digouezet Gwidou. Dres e oam o vond kuit. Pedet om da verenna hirio gand ma henderv, aotrou Pennkelenneg, e parrez Purit. Poent eo mond en hent. Ha petra nevez, ma mignon Gwidou?»

« N'eus ket kalz a dra nevez ganin, aotrou, nemed an devez all, en eur vond da droha broen war balud Kergeu, am-eus taolet ma zroad war eun naer-wiber hir, hir... — Ken hir-ze, Gwidou? a houlennas an aotrou — Hirroh hoaz, aotrou paour, ken hir hag ar chapeled silzig a zo ganeoh amañ e tiretenn an daol.» Ha Gwidou a zigor an diretenn hag a zav ar zilzig er-mêz. An tri all a jom mantret. « Al loen divalo-ze, eme Gwidou hoaz, a glaskas flemma ahanon. Ne oa baz ebed ganin ha ne oulen ket peseurt mod en em zivenn pa welis eur mên, eur mell mên dirazon, eur mên ken braz... hag ar penn-hoh a zo kuzet ganeoh dindan ar baill-kouez.» Ha setu Gwidou o sevel ar baill hag o tibrada ar penn-hoh. An tri all a zo mud-pesk. « Me a bakas ar mên hag a daolas anezañ war an naer. M'ho pije gwelet an taol-ze! Al loen binimuz a oe pladet war an douar, ken plad... hag an toaz emañ an itron azezet warnañ.» Gwidou, den a zoare mad, ne gredas ket furchal dindan broziou an itron. An tri all a zo dislivet, nemed dremm an itron a dro da veza ruz-glaou. « Pez a lavaran deoh a zo gwir, ken gwir ha ma 'z on deut amañ da zebri merenn ganeoh. Ma lavaran gaou, ra vin-me displufivet noaz-ran ha sebellet er bank ken brao hag ar yar gêz a zo aze o hortoz ar ber.» Ha setu Gwidou o sevel golo ar bank hag o tineiza ar yar-lard. An tri all a lezas eun huanadenn hir. Heb grik ebed, ar vatez a grogas da enaoui an tan, an itron a baouezas da hori he vi toaz, an aotrou a c'hoarzas e-giz eur zaill o tiskenn er puñs hag a bedas an den Gwidou da verenna ganto.

Nemed ar houign-amann a oa trenket eun disterra.

Hemañ a laboure douerou Penkleuziou, a dreñv ar maner.



EUN DANVEZ KAER

ENDRO da veur a vaner, e Breiz-Izel, e kleved konta gwechall, eur goñchenn a skwer vad: hini aotrou ar maner, e pôtr-kezeg ha merh minorez ar marhadour skrag. Kemma ra an anoiou, ar gentel ne gemm ket. Er Hastell-Nevez, ar maner eo hini Kerarmoal, an daou zen yaouank a vez greet outo Perig ha Berhed ar Rouz. Livom ar goñchenn gand liou ar re-mañ, daoust ha ma c'hoarvezas kemend-all gand Yann ha Chann e maner Gilgivin Landudeg.

Ar Perig ma vo kaoz ganin outañ a vage eur galonad a garantez e-keñver ar Berhed ma lavar. Ha kement he-dije karet Berhed kaoud ar Perig da bried ma teue an dour en he daoulagad beb tro ma wele ar pôtr war varh pe war droad. Allaz! Perig paour a oa taget gand eur hlevfved hag a wan aliez ar re yaouank, da lavared eo e-noa nebeutoh a bezio eur skoed eged a vizied war e zaouzorn. Hag ar Rouz koz, perhenn war eur pez stal-genwerz e-kreiz ar vourh, a oa ken mignon d'an arhant ma vije bet gouest da douza kein eul laouenn-dar evid gwerza he bleo d'ar pillauer. O weled Perig o tond dirazañ da houlen Berhed digantañ, e-nije paket eun taol-gwad, ar rasteller liardou, ar skraber, ar gorer moneiz, divergont awalh da werza e

verh diouz ar goulou. Kement-mañ da rei deoh da houzoud, bugale, penaez Berhed a oa eur varhadourez re ger evid eur pôtr-kezeg, daoust ha ma pigne hemañ war varh gand kentrou dir.

Hogen, aotrou Kerarmoal a ouie pe garantez vraz a oa savet etre an daou zen yaouank, ha setu efi ha gervel e vevel: « Perig, ha gwir eo pez 'm-eus klevet? — Petra ho-peus klevet, mestr? — Emaoh o trei endro da lostenn Berhed ar Rouz? — Gwir eo, siwaz. Med amzer am-bo d'ober n'ouzon ket ped tro war-nugent araog ma vo roet Berhed da wreg din gand ar Rouz koz, rag n'eo ket kreñv ar yah ganin, c'hwioar. — Neuze e vefe mad deoh klask an tu da honid eun dornad peziou aour da astenn dirag an tad-kaer. — Me rafe n'eus forz petra, aotrou, evid dimezi gand Berhed. N'eus forz petra nemed gwerza ma ene d'an diaoul pe konta gevier. — Eun den a-zaore oh, Perig. Mad! Peogwir ne fell ket deoh gwerza hoh ene, marteze e werzfah din... ho fri? — Ma fri? Ha gwerzet e vez ar friou d'an deiz hirio? — N'ouzon ket mad, med prener on. Skuiz on eet, abaoe hanter-kant vloaz, gand ar fri a zo ganin dindan ma daoulagad C'hoant am-eus da gaud eur fri all. Me a bren ho fri diganeoh evid... deg

Endro da veur a vaner, e Breiz-Izel, e kleved konta, gwechall, eur goñchenn a skwer vad.



mil skoed. — Deg mil skoed? Ha bez ez eus kement a skoejou er bed-oll? — Respontit buan. N'am-eus ket amzer da goll. — Feiz aotrou, ma fri... Penaoz 'ta... Gand plijadur, ya, 'med... Nann, ne werzin ket deoh ma fri. — Deg mil skoed. — Nann, ne fell ket din ober truferez. Berhed a gar ahanon gand ar fri a zo ganin. Ma werzan ma fri, mar-teze e kollin he harantez. Nann, ma fri ne dalvez ket deg mil skoed, 'med Berhed a dalvez kant gwech muioh. Netra! — Mad, Kerzit wardro ar hezeg. >


Aotrou Kerarmoal a gerzas d'ar vourh. Aze, e kejas gand ar Rouz koz war blasenn ar Feunteun : « Ahanta, ar Rouz. Ho merh a zo o vond gand ma mevel Perig? — Penaoz? An teodou fall o tibuna flaperez. Birviken. Daoust hag e rofen-me ma merh nemeti d'eur pôtr-kezeg ha n'e-neus ket eul liard toull da domma e roched nag eun dornad douar da gaoud warlerh e dad! — He he! A-wechou n'ouzer ket mad. Selaouit 'ta! Kinniget am-eus, me ma-unan, deg mil skoed da Berig evid prena digantañ eun tamm deuz e zanzev. Hag ar pôtr e-neus lavaret nann. — Deg mil skoed? Eun tamm... Mil hurun! — Ya. Ha mad e-neus greet lavared nann. Ar pez a houlennen

digantañ, me ma-unan ne rofen ket anezañ evid tregont mil skoed. — Tre... Danvez Perig? Ne ouien ket. Eun tamm den eo ar Perig-se. Lavarit dezhañ e vo mab-kaer din pa garo. >

Eur miz goude, Berhed ha Perig oa dimezet. O tond er-mêz deuz ar stroun Varia ar Porzou, epad ma oa ar merh nevez o vond da ginnig he boked eured d'ar Werhez, ar Rouz koz a dennas gantañ aotrou Kerarmoal evid gouzoud outañ petra oa danvez Perig, an danvez a dalveze ouspenn tregont mil skoed : « Danvez Perig? Feiz, komper, danvez Perig a zo... Perig e-unan. Hag an tamm am-eus goulennet digantañ evid deg mil skoed a zo... e fri. >

War an taol, ar Rouz a ginnigas lonka e deod. Diwezad e oa paket. Hag ouspenn, ne oa bet na gaou na truferez. Ma teuas a-benn an den da gavoud e alan adarre, eo abalamour e-noa péet pred an eured hag e felle dezhañ karga e gov evid e arhant. Ken fromet oa bet, avad, ma chomas e spered strafuillet hiviziken ha ma oe gwelet beteg devez e varo, o kinnig e fri da werza d'an dremenidi, war blasenn ar feunteun, er Hastell-Nevez. Med re bell e-noa poaniet da lakaad e zanzev er-mêz dioutañ, setu eñ e-unan ne dalveze tra ken. Ha ne gavas ket perhenn d'e fri.

Destumet eo bet ar merh-mañ ganin er menexiou. E-unan kaer e oa, heb tud ne mamm endro dezhañ.



MARH AN AOTROU PERSON

GOULENN a reer diganin ha chomet 'z eus em yalh eur pez daou wenneg bennag deuz an amzer goz. Feiz, ya! Dibouezit herañ.

Yann an Truilhou e-noa kalon awalh da vaga e laou, ha hoaz. E vaouez Janed a gare huñvreal war eur pao e-giz ar yar war he hlud. Arabad eta chom souezet m'e-noa kavet Kiez an Dienez he loñch en o zi. Ha koulskoude, da zevez o eured, an daou bried a oa e penn deuz ugent devez-arad douar tomm, daou di plouz hag eun ti glaz. Hogen, al loar e-noa paret dija en o genou. An douar a oe gwerzet dre dammou, gwerzet an daou di plouz, ha bremañ mein glaz an hini diweza a tilave puill war an treuzou pa c'hwewe an avel. Yann a vennas mond da laer.

Eun abardaevéz, e teuas an den d'ar gêr, o sacha gantañ eur marh war-bouez eur gordenn. Pa welas al loen, Janed a oe spontet. « Penaoz, mab ar reuz, n'ho-peus kavet netra all da laerez? — Ha neuze! N'eo ket mad al loen! Dastumet eo bet ganin er menezioù. E-unan kaer e oa, heb tad na mamm endro dezafi. A-benn eun devez bennag ahann, emañ foar vraz Hanter-Ebrel. Me a werzo hennez eun dornad mad a skoecjou d'eur marhadour kezeg bennag a Vro-Spagn. Bez e helloh lakaad eun disterra kig er zoubenn dre vara du.

Janed, avad, a oa kouezet azez, dislivet war eur skabell : « Anaoud a ran ar marh-se. Marh an aotrou Person 'ni eo. Dlod a zen! Marteze 'z eus ouspenn kant marh er vro hag ho-peus kavet an tu da rísa an hini nemetañ ha ne fazio den ebéd warnañ. A-benn bremañ, eman ar barrez-oll war ho lerb. »

O klevéd kement-se, Yann a bakas eun taol. Med eun den empenner e oa : « Greet eo ar c'hoari. Dond a rin e tu da werza al loen, ha pa rankfen diskrohenna dezafi linenn e gein ha teurel warnañ eur hroben all. Digorit ar marchosi ha klaskit eur begad foenn er hraou. Warhoaz emañ ar zul. C'hwi a yelo d'an overenn-bred hag a zelaouo piz prezegenn ar person. »

Antronoz, Janed a zistroas deuz ar vourh, strafuillet-glaz an tamm outi hag he bleo o krena dindan he hoof. « Ar wech-mañ emañ daonet on-daou. N'ouzon ket hoaz petra c'hoarvezo, med an ivern a hortoz ahanom. — Lezit an ivern da glouara ha displegit ar brezegenn. — Ma, an aotrou Person a zo pignet er gador ha gwall fuloret e oa an den santel : « Laeret eo bet ma marh diwarnon, a yudas-efñ, ken a dregernas an doenn gantañ. Bez ez eus bet eun bennag dizonest ha divergont awalh evid divarha pastor ar barrez-mañ. Mad eo! Ma finijenn a rin-me o redeg

C'hwi a yelo d'an overenn-bred hag a zelaouo piz prezegenn ar person.



bro war ma zreid, dindan kement amzer a vo. Hogen, selaouit ahanon mad. Peogwir eo bet laeret ma marh, GREET EO MA ZONJ GANIN! Ya, ha ma 'z eus eur hristen en ho touez ha n'emañ ket ar peoh en e goustianz, ra ouezo hennez EO GREET MA ZONJ GANIN! » Pemp pe c'hweh gwech e-neus adlavaret kement-se. Ha gand ar wech diweza e-neus distaget eur pezh taol dorn war rizenn ar gador, ken eo kouezet e leor overenn war varlenn Chan ar Rouz, azezet evel kustum ouz ar piler abalamour eo mouzet he diskouarn outi. Ha setu! Araog pell e vim eet da goll! »

Hag ar vaouez paour a ouele doureg en he zavañcher sul. Yann an truillou en em gavas gwall nehet. Mond a reas d'ar marchosi. Ar marh a zellas outañ gand eul lagad den hag a zirollas da c'hoarzin. Epad an noz warlerh, nag al laer nag e vaouez ne helljont kousked. Klevet a reent mouez divent ar person en iliz : GREET EO MA ZONJ GANIN! Hag ar marh, a-dreñv ar voger, a skoe gand e garn, dibaouez, *mea culpa, mea culpa*.

Da houlu-deiz, an aotrou Person a glevas skei a-daoliou war e zor. Pa zigoras, e welas Yann an Truillou dalhet gand eur penn-kordenn, ma c'hwirine eur marh er penn all outi. « Salud deoh, aotrou Person. Dres deh d'abardaez, am-eus kavet ar marh-mañ o taoulammad ruz er menezier. Moarvad e oa gantañ eur gelienenn dindan e lost, o wana anezañ didruez. N'eo ket bet brao din teurel ma dorn war e voue. P'eo deut al loen ganin d'an ti, Janed, ma gwreg, hag a oa bet en overenn-bred, a lavaras din ho-poa kollet ho marh. Setu e tiganas anezañ deoh. — Yann gêz, marteze n'eo ket hennez ma hini. — Eo, eo, aotrou Person, al loen-ze n'eo da zen all ebed. Konta reer, er vro, penaoz ho marh a oar latin. Hag hemañ, e feur ma welan, a oar latin ivez. — Sell 'ta! Daoust ha klevet ho-peus anezañ gand e gaouz? — N'am-eus ket da vad. Med m'henn goar ervad, ma stagfe da gaozeal, latin eo a deufe dioutañ, n'eo ket brezoneg. Hanter-glevet am-eus digantañ. — Hanter-glevet! Netra souezuz neuze. Eun hanter-vrezoneg a zo heñvel awalh ouz eun hanter-latin. Lezit anezañ da zond e-barz! Gwelet vo hag-eñ e kavo e varchosi. »

Kavet eo gantañ war-eeun, hag al laouer ken brao hag all. An aotrou Person a bedas Yann an Truillou da zebri eun tamm ha da hlebia an tamm gand eul lomm. Kaer, avad, e-noe Yann ober, an tamm ne ziskenne ket frank. — Ahanta, Yann, 'm-eus aon n'emañ ket mad en ho krohen. — Eo, eo, aotrou Person, nemed eun dra a garfen gouzoud diganeoh. — Petra 'ta! — Lavaret ho-peus, en overenn-bred : laeret eo bet ma marh diwarnon, med selaouit mad : GREET EO MA ZONJ GANIN! Hag adlavaret ho-peus pemp pe c'hweh gwech : GREET EO MA ZONJ GANIN! Peseurt soñj a oa ganeoh, aotrou Person? »

An aotrou Person a vousehoarzas : « Peseurt soñj? Ne oa nemed unan d'ober, ma den paour : gwerza an dibr hag ar rañjennou, peogwir n'am-oa marh ebed ken. »

Kredit ahanon m'ho-peus c'hoant. Yann an Truillou a zo deut da veza eul labourer-douar madig awalh. Pez e-neus estonet an oll nemed person ar barrez ha marteze e varh.


AR MARHADOUR DAELOU

An den Gourgon ar Big a foete henchou Kerne-Izel deuz an eil merouri d'eben gand e oll stalgenwerz a-istribill ouz e houzoug, eun arhig koad tano leun a draouegez daou-wenneg evid boueta lorch ar merhed. Gourgon a zigore kloued ar porz d'ar mareou ma veze ar wazed er parkeier hag a gane sklêr, war jalpadeg ar hi : « Erru pôtr ar spillou! Penn du, penn gwenn, penn koar, penn da brenn... penn da brenn... penn da brenna! » Digouezet mad e oa Gourgon peurvuia, daoust ma honeze muioh a voneiz rouz eged a beziou ugent real. Eun den a zoare, feiz, hag e-noa eun tamm peadra en e voest, peogwir e veze gantañ, ouspenn e spillou, beb seurt liezez ha seizennou, neuzeier ha nadoziou. Ha dalhmad e wellae an traou gantañ. Deut e oa da werza paperez da skriva, e-giz eur marhadour deuz ar hêriou, ha koulskoude ne ouie ket lenn. A-wechou, zoken, e veze gantañ beteg eun dou-senn meleziouriou bian gand patrom merhed ar sinema war an tu eneb. Kement-mañ da lavared deoh penaoz an denig Gourgon ne oa ket eul lampon divalo, med tostig-tre da veza eun aotrou e-touez ar re vian. Ha dond a reas da veza eun aotrou, e gwir, goude an devez ma c'hoarvezas gantañ gwerza e zaelou.

Gourgon a dremene dre eur vourhadenn bennag, e Kerne, pa welas eul lienenn wenn staget a-uz dor eun ti

ha diou rujerez voulouz du kroazet warni d'ober da houzoud e oa eur horv maro e-barz, o hortoz eun arched. Dre ma oa eun den douzuz, Gourgon a zoñjas mond tre da lavared eur bater evid an hini maro araog bale pelloh. A-boan e-noa taolet e dreid dreist an treuzou ma klevas trouz ar haoziou hag ar c'hoarzh. Ar zal a oa leun a dud en o dillad-kañv, da vad o komz etrezo a vouez uhel e-giz posubl e vijent bet war al leur-foar pe o hedal eun eured. Koulskoude, ar horv a oa astennet war ar gwele, eun den koz e vleo louedet hag e zremm tagnous.

« Gurun, a lavaras Gourgon d'e dok, kouezet on amañ e-touez al loened gouez. Pegen divergont eo ar re-mañ 'ta! » Pôtr ar spillou a dostaas ouz ar horv hag a benndaoulinas d'ober eur bedenn warnañ, goude skulla eur banne dour benniget. O weled kement-se, an dud all a reas peoh war eun taol. Echu e bater gantañ, Gourgon a glaske an nor pa zantas eun dorn o frapa war e jupenn. Eur vaouez 'ni oa, eur pezh maouez seh-korn, goloet penn-da-benn gand he mantell-gañv, hag a dennas anezañ war-du an oaled : « N'anavezan ket ahanon, med c'hwia a zo eun den a urz vad, hervez pezh a welan. — Hag ez on, feiz, a respontas Gourgon, c'hvero an tamm outañ. Nemed 'm-eus aon da veza ma-unan en ti-mañ. — Araog feuka, selaouit kentoh, emezi. An hini maro eo ma zad. Epad



e vuez, biskoaz n'e-neus greet vad ebed da zen na darempredet kristen ganet. Tenna gantañ ha derhel gantañ ar muia ma helle, ya, evid-se e oa ar henta, ha pell araog an eil. Ha bremañ, sellit : maro eo ha ne gaver den da gaoud keuz dezañ, den da leñva war e gorv. Eun druez! — Eun druez? Perag na leñvit ket, c'hwi hag a zo merh dezañ? — Allaz, kement ameus leñvet gantañ epad ma oa beo ma ne jom ket eun dael ganin. Setu perag e houllennan diganeoh dond em hichen da heul an interamant ha leñva doureg etre an iliz hag ar vered. O weled ahanoh glaharet, ar re all a raio peoh. A-hend-all ez int gouest da zañsal ar gavotenn a-dreñv ar harr. Se a vefe eur vez.

— Maouez paour, me a rank mond da werza ma spillou.

— Ne golloh ket hoh amzer. Daou skoed a roin deoh ha boued.

— Mad, eme ar Gourgon, evid daou skoed ho-po glao puill. »

Ha Gourgon ar Big a heulias ar horv, o skuilla daelou ponner da honid e zevez. Klevit bremañ ar peb gwella : dre ma tenne dour diouz e gorv, efi a zoñje pegen spontuz eo mervel heb nikun da gaoud diouer deoh, pegen fall eo an dud etrezo ha pegen dizonest eo... ober van ar glahar evid daou skoed arhant. Setu, war an diwez, ar spillouer a leñve evid mad war vab-den ha warnañ e-unan. Leñva reas penn-da-benn gand an hent etre an ti, an iliz hag ar vered, leñva a reas gwasoh hoaz o tond endro evid al lein interamant. Ken souezet e oe an dud o weled kement a zaelou ma ne gredas den ebed tafiva soubenn ar hig beteg ma teuas merh an hini maro da ginnig daou skoed all d'al leñver evid dezañ seha e zaoulagad ha leuskel an dud da zebri.

Diwar an devez-se, Gourgon a valeas war hent ar binvidigez. Eun den hag e-neus kavet gwerz d'e zaelou a zo gouest da vond da werza kerniel nevez d'an diaoul.

YANN E-VOTOU-SKANV

Ma oa ken paour tud ar Gosker-Vian, paour da laza, ne oa netra kaoz nemed an tad. Eun tad hag a oa outañ ar gwella den e-neus tennet biskoaz e alan war an tamm douar-mañ, nemed seiz avel ar bed a voude en e benn. Hag an tad a zente atao ouz an aveliou-ze, o hervel anezañ da vond ganto da haloupad bro. Ne houzañve ket an den paour beza staget ouz e di, e-giz eur vuoh ouz eur peul war-bouez ar fun. Labourer-douar e oa rag, abaoe kantvedou, mestrig ar Gosker-Vian a skuille e c'hwezenn da larda aotrounez ar Gosker-Vraz. Ar Gosker-Vian n'eo nemed eun tiig-soul divalo, eul liorzic endro dezañ ken striz hag eul lasenn

Leñva reas penn-da-benn gand an hent etre an ti an iliz hag ar vered.



koef-pemdez. E-kreiz douarou ar Gosker-Vraz emei dalhet. Ar Gosker-Vraz, outi n'ouzon ket ped devez-arad war-nugent, a garfe mougá ar gerig zister-ze e-giz eur c'hwibuenn paket en eun nez-kevnid. Mil gwech o-deus goulennet mistri ar Gosker-Vraz digand perhenn ar Gosker-Vian gwerza dezo an tamm loñch munudig, beuzet e-touez koajeier, lanneier, parkeier, prajeier ha foenneier o hêr. Mil gwech eo bet respontet dezo nann, ha nann adarre, ha nann hoaz, ha nann atao. Beb tro ma varve mestr ar Gosker-Vian, ar mab kosa, war e lerh, a gemere ar stal.

Setu perag hemañ, an hini diweza, daoust ma felle dezañ mond da vartolod, a rankas chom en ti, en despet d'e c'hoant, evid senti ouz youl ar re goz. O kempenn al liorzic gwella ma helle, e tenne dioutañ, beb bloaz, eur vriad pour, deg lur karotez ruz ha daou zahad avalou-douar. Hogen, nao a vugale e-noa. E-giz ar re goz, e oa red dezañ mond da zevezia d'ar Gosker-Vraz evid kaoud boued da neizad tud ar Gosker-Vian. Med, eur wech ar bloaz, e kleve en e benn hekleo eur galv hag e kerze kuit war an henchou, eur zah war e gein, o kana ken flour hag eun eostig, divotou krenn, e galon o tridal gand al levenez. Evid-se, an dud a vev sul-gouel-pemdez etre park ha ti o-doa greet outañ, hanter hoap, hanter zoujañs, Yann e-Votou-Skañv.

Epad ar goañv, hoaz, Yann a jome endro d'an ti mad awalh hag a boanie stard o tevezia er Gosker-Vraz. N'eo ket brao ober kov moan d'ar goañv hag an den a gare kalz e wreg hag e vugale. Evito e stourme kaloneg er parkeier dindan ar gwall-amzer. Deut d'ar gêr, goude e zevez, e kroge adarre da doulla boteier-koad da werza d'an dud tro-war-dro. Nann, ne oa ket Yann eun didalvez nag eur holl-e-amzer. Hogen, epad ma oa e zaouarn o vond, e spered ne oa ket war e labour. Nijal a ree pell dez ar Gosker-Vian, etrezeg ar broiou estren, ar broiou dizano e-leh m'eo chomet en e bez Baradoz an Douar, an Nevez-Amzer beurbaduz.

War e voteier-koad, Yann a gizelle skeudennou kaer ma ne ouie den ebed mad-tre petra oant, loened iskis gand daoulagad braz, kluchet e-kreiz liorzou burzuduz, kalonou entanet en eur gurunenn daelou, pesked ar mor ha frouez an douar, an heol hag al loar chadennet an eil ouz egile gand oll stered an neñv. Hag an arzour a live ar boteier gand al liou a denne diouz beb seurt geot dastumet gantañ war ar menezioù treud. Ken brao e oant ma tirede an dud a beb tu da brena anezo digantañ, dreistoll ar merhed yaouank. Ken sikañv e valeent ganto, ar merhedigou, ma ne yeent morse skuiz ha ma krede dezo e tremenfe an amzer heb kas da goll o yaouankiz. Ma vije bet Yann eun den a skiant vad, e vije deut pinvidig arag seizdaletoh. Med aliez e roe e voteier evid netra d'ar re baour, aliesoh hoaz ne felle ket dezañ gwerza anezo pa ne blije ket dezañ doare ar prener. Hag a-wechou ivez, ar boteier a oa toullet ha kizellet ken brao gantañ ma n'e-noa ket kalon awalh da zispega diouto ha ma kuze anezo dindan doenn soul ar Gosker-Vian. Hervez ma

Ar Gosker-Vian n'eo nemed eun tiig-soul, eul liorzic endro dezañ ken striz hag eul lesenn koef-pemdez.



konter, e-kreiz teñvalijenn an nozveziou goañv, an doenn a lugerne hag a strinke eur houlaouenn hlaz dreist-natur.

Allaz! Ar botaouer Yann a gare mond d'azeza war ribl ar mor, melkoniuiz ha glaharet, abalamour ne oa ket bet aotreet dezañ mond d'ober tro ar bed war eur vag ha selled ouz an heol o sevel war ar hêriou gwenn astennet a-hed an tréz, war vevenn ar hoajou don divennet ouz mab-den.

Hag ar goañv a varve gand an ebrel. Bleuniou an Nevez-Amzer a skoulme er gwez, ar geot druz a grene war an trestou dindan lazig an avel e c'hwez vad, an alhoueder a zave uhel ha plomm e donder an neñv flamm. Diouchod ar vugale a ruzie dindan lamm ar gwad fresk. Abarz pell e vefe gwelet an dud o tebri ar yod kerh war dreuzou an tier. Yann a verve e c'hoant en e greiz. Mond kuit, mond pell, mond kuit, mond pell, mond ahann, mond ahann da glask petra 'ta? N'eus forz. Selled a ree ouz ar houmoul gwenn o tremen dirazañ hag o treuzi war an dremm-wel: « Deus ganeom, den paour! Perag chom aze? Perag mervel heb gweled biken kaerder ar broiou dianav! » Ha Yann a huanade: « A, mond kuit! »

YANN WAR AN HENCHOU

Ar wreg hag ar vugale a anaveze mad kleñved an tad. Med petra ober? Lezel anezañ da vond ha chom beo gwella ma hellent beteg e zistro. Epad an hañv e vez kavet boued awalh war ar mêziou. Ha ma vije deut, eur wech, an naon da veza re griz, dindan an doenn e lugerne brava boteier Yann, mad da werza evid prena bara. Kerzit kuit, tadig kêz, peogwir ho spered n'emañ ket ken ganeom! Hag eur mintinvez, pa zihune ar vugale, oh astenn gouzoug er-mêz euz o gweleou-kloz, ne welent ken diskoaz an tad e-tal an daol, war-du ar prenestr: « Da beh eo eet an tad, mammig? — Ho tad a zo eet da gas an toaz d'ar forn. » Hag ar vamm a walhe bolenn-bri mestr ar Gosker-Vian hag a lakee anezi war ar mestell, da hortoz eun devez bennag, e dibenn miz du, pa zeufe d'ar gêr Yann e-Votou-Skañv, leuniet e benn ha goullo e gov.

Yann a halve atao ar memez digarez da vond en hent. Eun abardaevez, e lavare d'e wreg: « Marijanig paour, lakit din an toaz e go d'ober eun dorz vara zegal. Warhoaz ez in d'ar vourh hag e kasin da boaza d'an ti-forn. » Marijanig ne ranne grik. Leñva ree eun disterra dre guz hag an daelou, en eur goueza en toaz, a zelviche da hollen. Nag eñ nag hi ne gouskent epad an noz. Araog ar zav-heol, antronoz, Yann a daole an toaz er zah, ar zah war e chouk ha kenavo!

Setu ar botaouer burzuduz war-lerh e c'hoant. Ar bed-oll a zo dezañ. E zaoulagad n'int ket braz awalh. Lamm e galon a dregern dre e izili penn-da-benn. Kan al

Yann a gare mond d'azeza war ribl ar mor,
melkoniuiz ha glaharet



lapoused a denn anezañ pelloh. Kenavo d'ar merouriou kuzet a-dreñv ar gwez, kenavo d'an tier ruz er hroaziou-hent, kenavo d'an dud daoubleget war an irvi, kenavo d'al loened o tivogedi er beure fresk epad ma stlejont eun alar stardet en douar gleb, kenavo d'ar Gosker-Vian. Er vourh, Yann a jom da hortoz ma vo poazet dezañ e dorz vara-zegal. Pa ziskenn an heol er mor a-dreñv e gein, ruz-glaou, emañ ar botaouer a vale eun war an noz, deg lur vara gantañ en e zah o tomma dezañ e chouk. Bale a ra heb ehan, sioul, o selaou trouz an noz, o komz dilavar ouz al loar, o sevel en e benn ijinou kaer. Hag ar mintin a gav anezañ war eun dorgenn bennag, o hedal an heol hag o trugarekaad ar vuez venniget.

Neuze, e krog Yann gand e redadeg. Eun devez e peb leh, eur pred e peb ti. Deuz peleh e teu? Da beleh e ya? Den ne oar mad. Gweled a reer anezañ o tigouezoud er hêriou, da vare ar foenn, pe an dornadeg, pe an avalou-douar. N'eus ki ebed da harzal outañ, den ebed da houlen n'etra digantañ. Kregi a ra en eur forh, eur varr, e penn eur marh. Eul labourer kaer eo. Nemed a-wechou, e-kreiz an dalh, e sav e benn d'al laez o selaou n'ouzer ket pe vouez o hervel. Hag aliez, setu ar forh pe ar varr d'an traoñ, setu ar marh digaset d'ar gêr d'e vestr hag an den kuit. Lezel a reer anezañ da vond. Morse ne gemer gwenneg ebed. Med eun dorz vara-zegal a ya gantañ en e zah, beb mintin, deuz ar gêr m'eo chomet da gousked enni. A-wechou, p'en em gav e-touez kouerier o tiskuiza, e sav e vouez da gonta dezo traou ken brao m'o-deus c'hoant ar merhed da leñva ha ma sell ar wazed outañ e-giz pa vije eur profed euz an amzeriou koz.

E dibenn miz du, bugale ar Gosker-Vian a azeze beb abardaez war dreuzou an ti-soul da hortoz an tad, Yann e-Votou-Skafiv, eet da glask Baradoz an douar gand toaz ar bara war e gein. Hag eur wech, pa ziskenne an heol er mor ha pa goueze ar yenijenn war an douarou noaz, e welent eur mell den o tond war an hent, eun dorz vara gantañ war e benn, en eur zah lien tiegez. Ar vamm, raktal, a oa war an nor, ganti ar volenn-bri leun a zoubenn domm. An tad a errue dirag e dud, treud ha skuiz. E zaoulagad glaz a bare war ar wreg hag ar re vian, leun a levezeg hag alaouret a sklerijenn. A vouez izel, mouschoarz eun el war e vuzellou, Yann a lavare dezo, en eur denna an dorz deuz ar zah : « Bennoz Doue warnoh oll. Pellig on bet oh ober ma zro. Med ar bara a zo fresk ganin. Tañvit anezañ. Gwelloh bara ne vez ket kavet er pinvidika rouantelez. »

Neuze Yann a azeze war eun dorchenn vên, e-tal ti-soul ar Gosker-Vian, da ziskenn e zoubenn dirag ar Housk, laouen e galon ha sioul e benn. Ar vamm a drohe, da beb bugel, eun troñsad bara deuz an dorz a oa deut d'ar gêr e sah an tad. Hag ar bara a oa fresk, hanter-domm hoaz. Bemdez, epad ma rede Yann an henchou, mestrez an ti ma oa chomet an den da nozia ennañ a denne an dorz vara deuz sah ar botaouer, da houlou-deiz, evid lakaad en he leh eun dorz vara all, heñvel mik ouz hini an derhent, nemed e oa o tond er-méz deuz ar forn.

Setu ar botaouer burzuduz warlerh e c'hoant.
Kan al lapoused a denn anezañ pelloh atao.



ERO AR HANTIK

Eur bann-heol a zil e vel dre zoriou ar gwele-kloz. Ifig a zigor eun hanter lagad. War raz gwenn-kann ar voger, e wel treset patrom daou lapous iskis, eur gurunenn gurgidi dezo da glipenn. Ar pavoned-se a zo bet kizellet e kistin an doriou gand an amenezur e-neus greet ar gwele, wardro ar mare ma oa Napoleon Bian impalaer war Vro-Hall. Maro pell zo an amenezur, med ar pavoned a zihun bemdez gand an heol hag a ro urz da Ifig sevel evid mond d'ar skol, e-leh ma heller lenn, war ar paper, doare an impalaer a zo maro ivez. Ifig en em gav laouen braz da veza beo-birvidig hag a zigor an hanter-lagad all evid tenna ar gwella mad deuz e vuez. Savet eo en e benn emañ hirio ar yaou. Hirio, an tad-koz Gwenole a zo eet da Gerlaeron d'ampresta eur marh evid arad Park ar Vesperenn hag an Ifig a vo e penn ar marh. Eur gwaz, eta, eur mevel braz, pe dost.

Ar mevel braz Ifig a zigor krenn doriou e wele, a ra eul lamm en e vragou, a ziskenn en e votou hag a skarz er-méz heb teurel eur zell war ar skudelladou soubenn o tivogedi war an daol. Red eo en em zibikouza da genta, c'hwez ar zoubenn a zo kalz gwelloc'h pa 'z eo fresk ar hrohen war al loen beo. Dirag ar puñs, an tad-koz Gwenole, war gorr e roched, a ra e reuz endro d'eur zaillad dour. Kemer a ra outañ leun e zaouzorn hag e taol flahadou war greiz e zremm beteg leunia peb toull digor. Hag hiñcha e fri, brouda e ziskouarn, skarza e houzoug, ha terri ar paz hag ar zifern, ha c'hoarzin e-giz ar gurun o weled e vab-bian o redeg war-du ar zaill : « Ahanta, pôtrig, bouetet awalh ho-peus ar c'hwenn? Tostait amañ, ma vo benniget ar hristen! » Ifig a oar Petra c'hoarvezo. An tad-koz a raio eur volenn gand e zaouarn, a bako eur volennad dour hag a zigoro strad ar volenn war glopenn ar hrennard. Hemañ e-no stouet e benn, nemed e santo sterigou dour-puñs o ruilla en e gerhenn, dindan ar roched lien-tiegezh. Hag an daou gañfart a jomo da zihargadenni, c'hoarz ouz c'hoarz, d'en em venniga adarre an eil egile, epad ma lammo etrezo ar hi Vaouig, eur zodig a gi gand e bafoe eun disterra re hir, e ziskouarn eun disterra re verr, hag e lost ken boul hag e fri. Beteg ma vo klevet mamm ar pôtr, war dreuzou an ti : « Tad, emañ ar zoubenn o yena. Echu ganeoh ho troiou termaji? C'hwi n'oh ket furroh eged ar bugel. — Nann, feiz, ha n'on ket! » a c'hoarzo an tad-koz Gwenole.

An daou zen, braz ha bian, a zistro d'an ti war-bouezig. Arabad sailla re vuan war voued ar mintin pa n'eo ket gonezet hoaz. Ifig a gas an torchouer endro d'e veg d'en em zeha. An tad-koz a zeho e zour-puñs dindan an heol evid arboella e c'hwezenn. Emañ en e zav dirag e skudellad soubenn, e vleoe louedet ha gleb reustlet-direustlet endro d'e dal moal, re-bar d'eun neiz pig goude an arne. Sevel

N'eus ki ebed da harzal outañ, den ebed da
houlenn netra digantañ.

a ra e zaoulagad d'an neñv, ha digeri e zivreh, ha diskouez palv e zaouarn : « Aotrou Sant Gwenole benniget, emezañ, ma n'eo ket ma halon glan dirazoh ha ma spered didro, ma 'z on den re fall evid ar boued dispar a zo bet aozet din gand Seza, ra faouto ar skudell-mañ etre daou ha ra yelo ar zoubenn da goll a-dreuz al leur-zi. » Ar homzou diweza a zo hanter-vlejet. Priajou a gren war vantell ar ziminal gand eun titirin sklintin. An tad-koz a hortoz eur boutadig, e zaoulagad dispourbellet war ar skudellad soubenn. Ifig a hortoz gwasoh hoaz. Gouzoud a ra eo deut an tad-koz d'ar gêr, deh d'abardaez, badaouet eun disterra. Marteze an aotrou Sant Gwenole a zo kounnaret hag a lako ar skudell da darza? Netra n'erru. An tad-koz a ra sin ar groaz hag a grog da labourad gand e loa da ziskenn e zoubenn. Ifig a boagn war e lerb, brein a lorb abalamour e-neus eun tad-koz e galon hlan hag e spered didro.

Eun nebeud goude, emaint er park. An heol a zo splann, al lapoused a ragach er hleuziou, an douar digoret dindan ar hleo a daol e c'hwez tomm ha kreffiv. Ifig, o vleina ar marh ecunna ma hell, war eun taol a zo diskaret d'an traoñ gand skoaz al loen dihenchet. Kerkent, e sav moutez gurun an tad-koz o kana meuleudi da Zant Gwenole evid an anaoudegez vad hag ar blijadur da weled ar bed ken kaer en nevez-amzer. Dispeget e-neus diouz hël ar hleo hag hemañ a zo eet a-dreuz e-giz eun den badaouet araog koueza war du pe du. Warhoaz, aret ar park penn-da-benn, an dud o vond d'o labour a welo eun ero gamm-digamm etouez an erioù eeun-tenn hag a lavaro, gand eur mousc'hoarz : « Sell 'ta! Ero ar hantik. Gwenole koz e-neus kanet adarre meuleudi e baeron en neñv. »

BERED AR RE VORN

Ma kontan deoh hirio doare fentuz Bered ar Re Vorn, n'eo ket evid klask diverra deoh hoh amzer gand park ar peoh, ma ne glever ket ennañ kalz a gomzou didalvez ha nebeutoh hoaz a c'hoarzadeg; na d'ober an disterra goap ouz ar re n'eo c'hoarvezet ganto koll eul lagad e-doug o buez, siwaz, goude ma vije bet gwelloc'h da galz re all koll o zeod, peogwir n'eo mad an teod-se nemed da hlabousad flip-ha-diflip. Koulz am-mije gellet sevel eur goñchenn war Liorz ar Re Gamm pe Vaner ar Re Dagnous, da skwer. Med kement-mañ n'eo ket eur goñchenn. Ar wirionez 'ni eo. N'eus ket da farsal gand ar wirionez, evel ma klemme ki Lan ar Go pa oa gwanet gand an droug dent.

Ahanta, poent eo deom toulla ar gaoz da zeski deoh penaoz e kaozeer atao re. Ha dres, p'emañ ma zoñj ganin e ki Lan ar Go, hennez eo an hini a heulie an oll

An douar digoret dindan ar hleo a daol e c'hwez tomm ha kreffiv.



interamañchou, paour pe binvidig, heb fazia morse. Abaoe ma 'z eo maro al loen, beb tro ma ne vez ket dedennet kalz a dud gand eur vodadeg bennag, e vez klevet lavared : « ne oa ket eur hi, na zoken ki Lan ar Go. » Med biskoaz ar hi paour-ze n'e-neus heuliet eun interamant beteg Bered ar Re Vorn. Ha setu emañ deut endro da benn ar gaoz. Stagam stard ganti, ar wech-mañ, ha lezom spez ar hi e-leh m'emañ.

Mestr ar vilin-zour e-noa eur brouskoad a-dreñv e di braz ha ne ouie ket petra ober gantañ. Ar gwez ne zougont ket greun hag ar vilinerien emañ o dalh etre ar greun hag ar bleud. Ar paour kèz Gwenole e-noa eun tiad a vugale ha ne ouie ket penaoz kavoud bleud awalh d'aoza kaletèz evito. Evid kaoud bleud, e ranker rei greun d'ar miliner hag ar greun ne ra ket kellid e paly an dorn. Setu eun devez, ar miliner, ha ne oa ket eun den fall anezañ, dreistoll pa gave e vad abred pe ziwezed, a ginnigas da Wenole teurel ar brouskoad d'an traoñ ha difraosta an douar. E-ser kement-se, e hellfe labourad an dachenn ha dastum an eost evid e boan. Gwenole a reas bennoz Doue gand e dok, a grogas er vouhal, er varr, ha beh d'ar gwez, d'ar strouez, d'ar balan ha d'an drez ken e tregerne ar vro gand hekleo an taoliou.

Ar brouskoad a skoe war an hent braz. Peb tremeniad a ree eun ehan da zelled ouz an den Gwenole o teurel e c'hwezenn en e roched, eun druez, hag a houlenne : « petra rit aze, Gwenole? » Ha Gwenole a responte etre daou daol hag an eil devez goude egile : « O tiskar, o tifraosta, o kompeza emañ. » An dud a gendalhe gand o hent ha tud all a errue war o lèrh : « petra rit aze, Gwenole? — Diskar, difraosta, kompeza a ran. » War an diwez, ar paour kèz diaoul ne oa ket gouest ken da gousked en e wele heb klevet, a-dreuz huñvre ha penn-da-benn gand an noz, seiz kant mouez war-nugent, ponner, boud, sklèr, skiltr, o houlen digantañ : « petra rit aze, Gwenole? » Awalh da zodi.

Eur wech, e tigouezas war an hent Chefig Lagad-Pikous, eur vaouez koz ha ne oa outi nemed eun teod beo deuz ar glopenn beteg ar zeul. Ha setu he mouez o sevel ken pik ma tavas al lapoused krenn : « petra rit aze, Gwenole? » Hemañ a zehas c'hwezenn e dal gand kein e zorn hag a huanadas pell : « tostait, Chefig géz, tostoh hoaz. E pleg ho skouarn e rankan sila an dra, abalamour d'al lapoused a zo war-hed. Hag arabad deoh diguza anezañ da gristen badezet ebed ma ne fell ket deoh e tarzfe an dispah er vro. Deuit tostoh hoaz! » Chefig a grene kement gand terzienn ar mall ma kignas he fri ouz eur vodenn spenn o treuzi ar hleuz. « Selaouit, maouez, e berr gomzou! An aotrou Mèr e-neus divizet kempenn emañ eur vered nevez evid borned ar barrez hepken. Perag ar re vorn, ha n'eo ket ar re gamm pe ar re dagnous, n'ouzon ket. Awalh evidon. » Ha Gwenole a grogas adarre en e varr epad ma nije ar yar da gana kelou ar vi fresk.

Mestr ar vilin-zour e-noa eur brouskoad a-dreñv
e di braz.



Bugale baour! Antronoz, an aotrou Mèr a oe digemeret en ti-kêr gand oll dud ar barrez, beteg eur poupig ouz ar vronn. Pebez cholori! Ar re vorn a houlenne perag ne oant ket mad awalh da ziskenn en douar benniget e-kichen ar re all. Ar re all a glemme abalamour, war o meno, e lakeed ar re vorn dreisto. Ha ki Lan ar Go a hortoze war e lost. Kaset a oe dioustu ar hloher da glask Gwenole, ar henta bruder. Gwenole a zeuas war-bouezig hag a lavaras, ken sioul hag eun èl : « bered ar re vorn n'eus ket anezi. Med petra 'ta! An oll dud a dremene war an hent a houlenne diganin : Petra rit aze, Gwenole? Ha koulskoude e welent mad e can o tiskar, o tiffraosta, o kompeza, peogwir ez int labourerien-douar eveldon. O goulenn a oa sod awalh, neketa? Ha me am-eus dilennet em spered ar zota respont am-eus kavet. »

C'hoarzagadeg a oe er vourh epad eizteiz, ijin Gwenole a redas bro da heul ki Lan ar Go. Diwar-ze, brouskoad koz ar vilin-zour a honezas an ano « Bered ar Re Vorn ». Ha den ebed hiviziken, war an tu-ze, ne gredas goulenn digand eun all : « petra rit aze? » Kalz a gomzou nebeutth hag eur goñchenn muioh.

AVALOU ROUZ LAN AR STRULLU

D'AR mare ma lavaran deoh, e oa dibaotth an avalou eged ar vugale vian e bourh Lanbrug. Liorzou awalh, evid gwir, a drouze gand o gwez oll pa zave an avel-vor, med mogeriet e oant ken striz ha kestell arvareg an Daol-Grenn. Ouspenn-ze, ar skourrou a greske dreist ar mogerioù a-uz d'an hent ne oa ganto nemed avalou trenk, mad d'ar moh, avalou ar red-kov a zistage da goueza dirag ho fri pa oant eet brein dre al lost beteg ar galon, eh! Ha hoaz, ma vijent bet mad da c'hoari bolotenn! Med, gand an taol botez kenta, e tarzent e daou pe dri damm, o tiskouez eur vouedenn divlaz evid ober goap ouz ho naon. Awalh da zanka ennoh eur hovad droug, sellit, p'eman ho penn ganeoh a-dreuz. Nann, ne oa ket brao teurel an dent war eun aval reiz, nebleh, nemed a-dreñv ti Lan ar Strullu e-leh ma oa savet, dre hras Doue, eur pezh gwezenn heh-unan, heb an disterra garz na moger endro dezi, eur wezenn hag a zouge, beb eil bloaz, eur behiad avalou briz-rouz, eur burzud a zaour, kristenien, frouezenn genta Baradoz an Douar. Gwelloh avalou ne vo ket kavet er bed-mañ keit ha ma pado eur wezenn en he zav, na goude kennebeud. Ken brudet e oant er vro ma tirede bagadou kañfarted deuz ar hanton a-bez d'argadi warno, daoust ma oant divennet striz gand bugale Lanbrug, gouest awalh da ziveina o farrez penn-da-benn ha da gas brezel ar chouanerez noz-deiz epad miz gwengolo evid diwall ar « briz-rouzed » ouz gwall-c'hoantegez an estrañjourien.

Eur behiad avalou briz-rouz, eur burzud a zaour, kristenien, frouezenn genta Baradoz an Douar.



Ha perhenn an avalou? Feiz, tud paour, n'ouzon ket re vad penaoz en em gave an traou, med perhenn an avalou, abaoe eñvor den, a oa bet atao eur Strullu bennag ha pôtr yaouank koz. An diweza outo, Alan, a oa gwasoh pôtr yaouank koz hoaz eged ar re all araozañ peogwir n'e-noa na niz na nizez, den ebed da zebri e avalou, den nemetañ. Hag Alan, e-giz ar Strullued all, ne gave ket mad an avalou. Ahendall, ne oa ket paour awalh evid beza rentet da werza frouez ar wezenn. Da betra 'ta e talvez dezañ ar briz-rouzed? Da netra nemed da c'hoari gand al laeron war zigarez ober dispah d'e gorr. Alan a oa outañ eun denig seh ha gren. Beva a ree peurvua war e dreid noaz, nemed e-kreiz ar goañv du, pa c'hoarveze gantañ mond en eur re-votou fao gand eur gwiskad foenn e-barz. An dud a gonte penaoz Alan ne oa ket bet aotreet d'ober e amzer-zoudard abalamour ne helle ket gouzañv ar botou-ler heb koueza er rannalon. Red oa dezañ mond eur wech ar miz da di ar gov da lakaad troha ivinou e dreid gand an durkez vraz. Ken kaled e oa e garn dindannañ ma valee ar pôtr war zoul fresk ar parkeier, goude an eost, ken brao ha war eur ballenn-hloan. Hogen, pa veze aho an avalou, Alan a jome war spi, kuzet e-tal e graou, o hortoz ar ganfarted da zond da laerez an avalou briz-rouz. O lezel a ree da bignad er wezenn, da garga o rochedou ha, war eun taol trumm, e tistage warno eur jouadenn spontuz : « Harz al laer! » Kerkent, ar vugale a oa diskaret d'an traoñ a-dreuz an deliou, o wihal muioh-muia e-giz eun toullad yer dichouet gand eur mên, hag e skarzent a beb tu gwella ma hellent. Alan ar Strullu a zelle outo o redeg ha ne veze ket pell o tibab an hini a ziskoueze kaoud ar brava tiz. Neuze, an den a dufe en e zaouarn hag a gemere lañs war-lerh an teher. Kaer e-noa hemañ troidella a-zeou hag a-gleiz, en em zila dre doullou ar girzier, Alan a drohe dezañ e hent beb taol, a lamme dreist ar hleuziou hag a daole e grabanou warnañ. Ar skraper avalou a yude hag a houlenne e vuez. Poan gollet. Perhenn ar briz-rouzed a ziskenne dezañ e vragou war e zeulio hag a brade al ler fresk a-drid-kalon araog lezel ar paour kèz reuzeudig da vond, ken ruz e feskenn hag e jod. Ar paotrig a skuille eun dael bennag en eur zevel e vragou war dan e benn-adreñv, hag a veze diboniet buan o tastum an avalou endro dezañ. Rag Lan ar Strullu a leze bewech e laeradenn gand al laer evid priz ar bradadenn hag a zistroe d'ar gêr o c'hwitellad e levenez. Eun den mad, kea?

An amzer a reas e roud, Alan a zeuas da veza koz, ar remm a dagas dezañ e fizli, ar reder a rankas kemer eur vaz d'en em stleja. Adaleg neuze, kerent ar vugale a zivennas outo mond da laerez e avalou diwarnañ peogwir ne oa ket gouest an den paour d'o argas hiviziken. E-tal e di, Lan ar Strullu a leñve doureg pa zelle ouz ar briz-rouzed o vreina war ar skourrou heb dedenna skraper ebed ken. Ne badas ket pell. Eur wech maro ar Strullu diweza, ar wezenn vuzuduz a zizehas raktal ha blaz dispar an avalou briz-rouz a oe kollet evid oll vugale an tamm bed-mañ.



Da vare o yaouankiz e veze heñvedeg-gaon ar penkêriou, e ti pe di, pep hini d'e dro.

TAOLENN

| | |
|---------------------------------|----|
| Ar Votéz-Tan | 3 |
| Yann Skañv-e-Damm | 5 |
| Digoll Gwidou | 8 |
| Eun Danvez kaer | 12 |
| Marh an ootrou Person | 16 |
| Ar marhadour daelou | 19 |
| Yann e-Votou-skañv | 21 |
| Yann war an henchoù | 25 |
| Ero ar Hantik | 29 |
| Bered ar Re Vorn | 30 |
| Avalou-Ruz Lan ar Strullu | 34 |

Komanantit da
Gelaouenn Lennegel
"EMGLEO BREIZ"

BRUD

ar Yez hag ar Vro

| | |
|-------------------------------------|-------|
| Komanant-bloez | 15 LN |
| Komanant-skoezell, da nebeuta | 20 LN |
| Destumadenn nevez : | |
| — an niverenn | 4 LN |
| Destumadenn 1957-1959 : | |
| — an 10 niverenn | 25 LN |
| — an niverenn | 3 LN |

« BRUD », B.P. 17, Brest — C.C.P. 1921-04, Roazon

MILIEROU A LEORIOU-STUDI A VEZ LAKEET BEB BLOAZ DA DALVEZOUN
ER SKOLIOU gant harp « EMGLEO BREIZ » hag ar Strolladoù a ra war-dro
kelenn ar Yez. Skoezellit EMGLEO BREIZ evid ma vo lakeet muioc'h hoaz a leorioù
brezoneg etre daouarn bugale ha yaouankizou Breiz! Kasit ho prof da
« EMGLEO BREIZ » : « Fondation Culturelle Bretonne », B.P. 17, Brest -
C.C.P. 154-907 Roazon.

MARVAILLOU AR VOTÉZ-TAN a zo bet
embannet da genta war ar gelaouenn « La Bre-
tagne à Paris », e 1960 ha 1961.

TENNET EZ EUS BET DAOU VIL SKWERENN
EUZ AN OBERENN-MAN EVID EMGLEO
BREIZ WAR WASKELLOU HELIO-CACHAN.
E CACHAN

Peb gwir miret striz



Patrom lapoused iskis, eur gurunenn dezo da glipenn.